

# Relation Truezus

Composet var sujet preizerez, muntr cabilen ar  
ratimant hanvet an Alexandreus a Kourdeles,  
muntr al letant; n'antr ar mestr ekipach,  
hac eus a bavar martolod; laerorciou, pillach,  
ha fausseres paperiou ar valimant, erruet eus  
Indes sav eot, ar 27 eus a vis Du 1837.

Var ton ar Plach libertin.

**M**e ho ped a galon, Speret a Scelerisen,  
Da deurtezout hirlo cundui va fluén,  
Evit ma ellin déonet d'am brois da ziscleria  
Crimou eütus meurbet a rei d'ani ell cren.

Mkt den douç rei d'anaout an actionou vad,  
O cuniz eus a grimou e zeus goal galonad.  
Caromp bepret ar vertuz, bezomp ott güir  
gristenien.

Ha detestompa ar chritm hac an ell vuntrerien,

Croul, martoloded paour, eustam ouz en  
daujer,

Oblifet da Mouripa enep ar goal amzer,

Dionc'h tempest, diouc'h ar rec'hier, ha diouc'h  
ar mōr futorus,

Etoues an oll fourgass bepret qer danjerus.

Gantür gonrach ardant, en amzer ar brezel,

C'houi a gombatte ferm hon enemiet mortel;

Et fong eus ar pontoniou, coulz evel er pri-  
soniou,

E vouiech', vit ho pro, souffr pep seurt tour-  
miantchou.

Mes bremā neo qet se a drugare Doue

A ranqit da ziyoal evit ho sureté;

Dionz a vuntrerien e zeo, pere nasonjec'h biqen

A vije n'em rentet james da vonrrevien.

Sellaouit, Bretonet, dreis tolle houi, tud avôr,

Recita torfejou deus ar brassa horrer,

Coumettel dre an arrach deimeus an ambition,

Ha dre an ancoupac'h eus ar Relijon.

Daou vloas sp e parti demeus a guer Bourdel,

Ur valimant carguet a draou a bris huel,

Evit qær Batavia; en Indes eus a say eol,

Dre amzer gaer ha joa deus an eqipach oll.

An eqipach-se voa démeus a zeitec den

An autreu Louis Bouët, voa qenta cabiten;

Benead Marsaud, eilyet. Un dranqilje barset

A renne en o zones, hep soch e nep-torset.

Goude beza güerzel an oll varc'hadouez,

N'carg ar valimant hep dale a nevez

Demeus a draog brecius a dallie daou e baet,  
mil scoët,

E gemerjont ar mōr hac int contant meurhet;

An dalvoudeguez vrás demeus ar gargasón

A laqa en Marsaud ur goal ambition;

An diaoul deu d'e denti hac à laq en e speret

En em ampar a dout, neus fors dre bez torset.

Formi ra urc'homplod hac en em laq er penn,

Hac e choas consortet evit dont d'e zisen.

Qerqent en em glevjont ta, hac ebars en un instant

En em rentjont mestrou demeus ar vatimant.

Arrêt, den miserabl ! ha sonch eus un Doue  
Pini a bunisso da oll grimou un de.

Mes Marsaud oll furoret hac en un arrach euzns,  
En em decid d'ar c'hrim, allas ! ar maleuryu.

Ar paour qèz cabiten a servich var ar pont,  
Gant an drous a glèvas a voe carguet a spont;  
Marsaud a zaillas varnàn, gant darn eus e gonsortet,

Eyel iud furius, hac er mōr voe tolet.

Ar spouron, ar revolt a zo en un instant

Etre'r vartolodet ebars er vatimant :

Pelec'h ma hor c'habiten? agri e darn au voe;

Rentit anezan deomp, hor migau eo enat.

Inutil e zeo comz eno deus ar bourreo.

Nep rëson vad ebet en nep fêçon na gleo :

Vel ul leon arrajet, Marsaud, hep misericord.

A silap al letanant gant furor dreist ar bord.

O clasq dont da essât savetat e vue,

En em dalc'h ouz gerden ar vatimant penze.

Mes ar furius Marsaud a ras dézán disgregui,  
Hac en tolas ivé er mór evjt beuzi.

Neuze e gonsortet a zaillas var un all,  
Pini laqe' eves eus o desselgnou fall;  
Mes evel an daou gueuta, en despit d'e oll gou-  
tach,

Eo strinquet bars et mór... Doue pébes arrach!

Ar mestr Herve erru, armet eus ur gontet,

Exit clasq derc'hel penu demeus an dud rebel,

A zo qerqent assommet a doliou eros pistolen

Hac tolet bars et mór gant an dud inhuign.

Ar paotr yaouanc Dossel a zo neuze galvet.

Vit servich da bastur bars et mór d'ar pesqet.

Pardon! pardon, emezao; ah! roit din an

unzer

Viti ma scrifin d'ain zad va diveza dizer...

Nan, nau, eme Marsaud, louil e zeo ze:

Te yel gant ar re all da foñç ar mór ivé,

Ar buñuet paour zo' sllapet neuze ehars er

mór don,

O c'houlen ouz Doue e venediction.

Un all en deveds bet, iveauz ar mieus fin,

Dre urs an den barbar hac insam assassin.

Cetutae libec'h den beuzet, dre urzou an den ha-

gar?

Frem's a ra dre oll ar mór hac an douar,

Ne sun penos n'eo deut an tan demeus an eo

Da bñed'hì eno aufor ar t'hiou-se!

O festigouz en Doue! penos q'hì eus permettet

Da guément a grimou beza accomplissel !

Stouoinp dirac justic ar Vajesté divin :

Abred pe drvezad ar c'hriùm en devoñi.

Ma n'eo qet ar c'hriminiel scbet gant justic ar bed,

Ar Barner Souveren certen n'er manco qet,

Marsaud, barbare Marsaud ! poursu, poursu  
da rount...

Bâr eo da oll grimou ! dorn Doue zo varnout !

Na elles mui achapi ouz rebech da gouscianç ;

A lont ar mor e sav ar c'hiñi ! Venjanç ! ven-  
janç !

O Doue, va C'hrouier ! penos ellout compren  
En deus ellet Marsaud dont da veuzi sez dep !

Ket e vije counnaret dre valig an drouc-spergat,  
Vit dont da goumetti qeñlies a dorfet.

Sonjal a ras qerqent, en e gonscianç,  
Douet da bartaji neoze ar gorguezon ;

Mes an disputo dévoe, o rentas adversourien ;  
N'eljont en em entent en nep leçon a grent.

Erreuet en Newport d'an devez eus ar zul,  
E rençjot mont da gaout an autrou Vic-Cônsul,

Pebini, dre e furnes hac e vrás attantion,  
En eun douetas diouc'h-tu demeus an drahisop.

Neuze e gonsortet, po deveus se gouezet,  
A zo prest ha buan qerqent oll achapet ;

Mesgoude'recertenamizer, Raymont, unahaneze  
Zo digasset da Vrest ha barnet goudé-se.

Arrèletoe Marsaud, digasset neuze prest

Exit beza barnet er guer demens a Vrest.  
 Bars ar meines batinant e voa calz eus a desfou,  
 A ras anavezont eno e oll grimou.

An testou zo clévet, hac o deus deposit  
 Scîr mad d'ar baroerien qement voa erruet :  
 Marsaud meurbet effroutet ha carguet eus a  
 vombauç,

A voa terrubl hardi ha leun a arroganç.

Inutil e zeo dit faussi da baperiou ;  
 Var da faç e veler gravet da oll grimou :  
 Unan c'hoas a vanqe did; beuzi res da vouir  
 vignon,

An torfetour Gording, ar joa en da galon.

Herves an testeni, Raymont zo bet cavet  
 Nebeutoc'h criminal, hac e zeo condaonet  
 Da dremen e oll vue ransfermet en ur prison  
 Da laqat ar remors d'antren en e galon.

Ar'hoezeç a vis mieuse eo Marsaud condaonet  
 Gant tribunal a Vrest da verza dibennet  
 Var blacen vras ar C'hastel, da rei squer da  
 bepiñi

Var moment diveza ar c'hrimnal impi.

Qerqent m'en deus gouezet e voa bet con-  
 daonet,

Ar remors en e greiz a zo bet antreet,  
 O clasq hasten e vuez en deveus bet rappellez  
 Mes ar setanç zo bet ed antier qendalc'het

Celu etia an den leun a ambition,  
 Goude e oll grimou treante et galop

Oh ! Marsaud , muntrer insam , evit da grimou  
euzus ,

Te a renco eta souffr ur maro mezus !

D'an deg eus a vis mae , abardaes o vezza,  
Voe lennet e arrêt en e brison dézâ.

Qérqent en em interroch , hac e sant en e galon  
Ar c'hoant da gaout sicour eus ar Religion .

Laqat a ras pedi an Autrou Graveran  
Person a Sant-Louis , dont da gaout anezad.  
Ar person vertuzus-mâ gant hast zo en em  
rentet

Da gonsoli Marsaud , a voa dija semples.

Goude m'en deveus bet ar gonsolation  
Da receo ar sicour deus ar Religion ,  
Ar person a ro dezàn ar grucifi d'ar boqai ,  
Qérqent Marsaud a zant e gourach o crêvât .

En eur boqat d'ar groas , Marsaud ar ma-  
leurus .

A grie gant glac har i pardon , pardon Jésus !  
Me zo ur muntrer issam ; m'ho ped , deut d'an  
pardon !

E faveur ar maro e zàn da anduri .

Rentet e traou'r chassid , e poqas c'hoas d'ar  
groas .

Na demeus ar person neuze e tristroas ,  
Evit e drugarecat demeus an oll vadeles  
En devoa deurvezet caout vit ur pec'her qea .

Pa bign var ar chassid eo meurbet estouez  
O velet un nombr bras a douz eho rentet .

Ractal n'em ro d'ar bourireo ; emedi en e bou-  
voar :

E benn zo diruillet qerqent var an douar,

Justic' au dud a zo eta accomplisset ;

Ar victimou , ar mör a zo bremä yepjet.

Er quis-se ec'h echuo atao an oll vuntrerien :

Abred pe divezat ec'h erru o zermen.

Ur bôbl immânc a voa var blacen ar C'hastel

Evit guelet Marsaud o tonet da vervel.

Goaset, graguez, bugale, voa en em gavel eno :

Pebes arvest horribl voa qementise dezo !

C'hoqi , tadou ha mamou pere neus bugale ,

Elevit aneze ebars doujanc Doue :

Grit macarint ar vertus, ma cassaint ar c'hrimou ,

Hac e vezint eurus ar rest eus o deiziou .

Gouleñnomp ouz Doue d'hor guonderc'hel,  
bepret

Eo hon Religion , exant a bep pec'het ,

Evit ma teuimp un deiz , goude hór poat , da-  
repôs ,

Gant an oll re eurus é gloar ar barados.

**FIN.**

---

**E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon zu ar Vur.**